

An holl e Kemper d'an 13 da 1e13 !

Tous à Quimper le 13 à 13h13 !



UNVAN EVIT AR BREZHONEG

10 abeg evit manifestiñ

Ar c'henemglev nevez Stad Rannvro a ranko degas palioù uhelek evit gwarantiñ treuzkas ar brezhoneg ha respont d'ar goulenn sokial o kreskiñ. Fellout a ra deomp mont dreist ar skoilhoù ha ma vo disoc'hoù fetis da heul ar marc'hata etre ar Rannvro hag ar Stad !

- 1. Reiñ** tu d'an holl bugale kaout d'an nebeutañ un tañva d'ar brezhoneg ha da sevenadur Breizh (LCR)
- 2. Aesaat** digoradur lec'hioù nevez er c'hentañ hag en eil derez ha kreñvaat ar peadra el lec'hioù a zo anezho
- 3. Aesaat** ar stummadur e brezhoneg evit an implijidi na gelennont ket
- 4. Derc'hel** kont eus dibarderioù kelenn dre soubidigezh Diwan
- 5. Suraat** teir eurvezh sizhun a gentelioù brezhoneg e pep klas divyezhek an eil derez
- 6. Sevel ha lakaat e pleustr** ur steuñv diorren eus an danvezioù-kelenn anyezhel
- 7. Suraat ha talvoudekaat** ar skoliata divyezhek ha LCR betek ar vachelouriezh hollek, teknologiezh ha micherel
- 8. Stummañ** an danvez skolaerien ret, er c'hentañ hag en eil derez, dreist holl evit an erlec'hiadurioù hag ar c'hlasoù da zigeriñ
- 9. Aesaat** stummadur ar skolaerien
- 10. Brudañ** ar c'helenn divyezhek hag ar c'helenn da zibab

Poent eo kas an traoù war-raok, bremañ !

Emgav e Kemper, plasenn Sant-Kaorantin, d'an 13 a viz Meurzh da 1e13 !

Ret e vo gwiskañ ar maskl ha doujañ d'ar jestroù herzel

